

## INTRON VARIA RUMENGOL

Diskan: Intron Varia Rumengol,  
 Gwerc'hez galloudus, reméd holl,  
 Roit d'eomp hirio, en han' Doue,  
 Yec'hed ar c'horf hag an ene.



- \* 1. Lili arc'hantet o deliou,  
 War bord an dour, 'zo er prajou;  
 Doue d'ezo a roas dilhad  
 A skuilh er mêziou pep c'houez vat.
- \* 2. O Rumengol, pell amzer 'zo,  
 C'houi eo boked kaera hor bro;  
 Pep rozenn goant, pep lilienn  
 A zo disliv en ho kichen.
- \* 3. N'eus elestrenn ebet er prad  
 A daolfe kement a c'houez vat;  
 E Leon, Treger ha Kerne,  
 Ganeoc'h e klever c'houez an Nenv.
4. Bleunia 'rit c'hoaz en ho kozni  
 E liorzig goudor Mari;  
 Rak hor Mamm dous n'eo ket hedro:  
 Pa gar eur wech eo 'vit ato.
5. Warn an Arvor gant ar Werc'hez  
 Oc'h bet lakaet da Rouanez;  
 Rumengol eo he merc'h hena,  
 Ganti eo karet ar muia.
6. Hon tadou koz a ioa kousket  
 E tenvalijenn ar pec'hed:  
 Maro war roudou pep hini,  
 Ifern euzus o tigeri...
7. War ar maen ruz e skuilhéd gwad,  
 Hag er C'hrannou, e-kreiz ar c'hoad,  
 A-zindan dervenn Teutatez,  
 Tud 'veze lazé hep truez.
8. Tec'hit, doueou digalon,  
 Setu Gwenole ha Grallon;  
 Tec'hit, tec'hit...War ar maen ruz  
 Eo savet chapel Mamm Jezuz.
9. E lec'h ar gwad, dour ar vuhez  
 A red e iliz ar Werc'hez;  
 He c'halon eo an eienenn  
 Na vezo dižec'het biken.
10. E Rumengol ar pelerin (perc'hirin)  
 A bedo start war e zaoulin,  
 A welo a-dreuz e zaelou  
 Evel digor lez an nenvou.
11. Ma salud teir gwech an aoter  
 En eur adori Hor Zalver,  
 E vezo teir gwech benniget  
 Gant tri Person sakr an Dreinded.
12. Ma ra seiz gwech tro ar chapel  
 Gant Ave an El Gabriel,  
 Mari hen diwalle bepred  
 Diouz Satan hag ar seiz pec'hed.
13. Ha ma tigemer an hosti,  
 E galon ennan o virvi,  
 Ouz Jezuz e chomo stag mat:  
 Etrezo birbiken kimiad.
14. Pelerined, grit evelse,  
 Kaout a refot grasou Doue;  
 Hag-a-vec'h-deut-en-eur-lenva,  
 Ha pa vec'h deut en eur lenva,  
 C'houi yelo kuit en eur gana.